

II. Aozññ ha diorren an tiriad gall Tem 2: aozadur an tiriad gall

Koupabl on da:

I. Deskriviñ ha displegiñ pouez ha levezon Pariz

A. An tolpadur kêr Pariz eo un **tolead kêr** get Pariz ar c'hreiz.

Emañ galloudus get 18% ag an annezidi da lâret eo 12 milion a annezidi.

Un takad **pinvidikañ ha birvidikañ** eo an tolpadur kêr Pariz (goprou, sezoù sokial, labour, touristelezh).

Evit echuiñ emañ ul lec'h divizout pennañ (ekonomikel, politikel ha sevenadurel).

Galloudus eo an tolpadur kêr Pariz

- 3vet renk bedel àr-lerc'h New York ha Londrez
- Sezoù sokial embregerezhioù liesvroadel
- 1añ rannvro gall (poblañs ha pinvidigezh)
- Kreizenniñ a ra ar labour, ar glaskerien ha sternerien

Dedenniñ a ra

- 1añ rannvro touristel bedel
- 1añ hub aerborzh europat (Roissy a zegemer 60 milion a veajourien bep blez ha 5vet aerborzh ag ar blanedenn)
- 1/3 ag ar postadurioù etrevroadel kaset e Frañs a ya en tolpadur kêr Pariz

Ret mat en deus an tolpadur kêr derc'hel get e renk


- Kreñvaat e rol bedel
- Adnevezaat an takadoù kêr
- Gwelaat ar mont-dont
- Gwelaat ar c'hemmesk sokial

B. A-benn derc'hel get e renk bedel hag taliñ doc'h kevezerezh etrevroadell ar metropolennoù europat arall, ar Stad gall en deus kaset ar **raktres « Grand Paris »** abaoe 2010. Pal dezhi eo **kreñvaat levezon europat hag etrevroadel an tolpadur kêr Pariz** a-benn 2025, **stourmiñ enep an dizingalderioù tiriadel** etra an departamantoù en tolpadur kêr (skoazell da Seine-Saint-Denis a greizenn diaesterioù sokial hag ekonomikel) hag evit echuiñ **sterniñ an astenn hag meriñ ar c'hudennoù dezougenoù**. An oberourien pennañ er raktres-mañ eo ar Stad, ar strollegezhioù tiriadel (kumunoù, departamant, rannvro), an embregerezhioù, ar skolioù-meur ha kreizennoù imbourc'hiñ.

Gouiet a ran lec'hiiñ ha lakaat an elfennoù-mañ:

- Ar 13 rannvro gall
- An 10 tolead kêr kentañ àr kartenn an tiriad gall
- An tiriad gall (metropolenn ha tramor): an torosennadur, departamantoù ha rannvroioù tramor (Gwadaloup, Gwiana, La Reunion, Mayotte, Martinik) ha strollegezh tiriadel (Polynesia C'hall, Sant-Martin, Sant-Pêr ha Miquelon, Wallis ha Futuna, Sant-Barthelemy)
 - Ar stêrioù, ar menezioù, ar meteier an talbennoù-mor

Gouiet a ran sevel brastres aozadur an tiriad gall



Aozadur an tiriad gall

Meurgêriekadur bras

- Levezon kreñv an tolead kêr Pariz: kêr vedel
- Met toleadoù-kêr a za da vout brasoc'h ha kreñvoc'h (Bourdel, Tolosa, Montpellier..)

Takadoù get luskoù disheñvel

- Ar rannvro Pariz, enframmet e-barzh ar bed hag Europa
- Trobarzhioù birvidik e su hag e kornôg
- Norzh ha reter (Rannvroioù industriel kozh) é kemm oberiantiz
- Takadoù zo àr ar maez dilezet (diagonalenn ar goullo)

Un takad digor àr Europa hag ar bed

- Liammoù douar etre ar vegalopolenn europat (Eurorégions, riboul edan Mor Breizh)
- Liammoù mor a-dal ar porzhioù bras (Marsilha, An Havr, Dunkerque..)
- Kêrioù bedel (Pariz)
- Kêrioù europat (Lyon, Lille..)

Aozadur tiriad Frañs

Derc'hel soñj

Penaos eo aozet Bro-C'hall ?

Ur c'hêriekaot kreñv

- Tolpad-kêrioù Pariz
hollec'halloudek
- Diorroadur bras
kêrioù zo er peurrest
eus ar vro (Bourdel,
Tolosa, Montpelhièr...)

Tiriadoù dizingal o nerzh

- Bro-Bariz, enframmet mat
e-barzh lusk nerzhus Europa
hag ar bed
- Trowardroioù nerzhus
ar C'hreisteiz hag ar C'hornôg
- An Hanternoz hag ar Reter
en un enkadenn
- Maezioù zo lakaet diaes

Un tiriad digor war Europa hag ar bed

- Etrefasoù war zouar gant
megalopolenn Europa
(Eurorannvroioù,
tunnel dindan Mor Breizh)
- Etrefasoù war vor gant
ar porzhioù bras (Marsilha,
an Havr-Nevez, Dukark)
- Ur c'hroashent daremprediñ
bedel (Pariz)
- Kroashentoù europat
(Lyon, Lille)